

AVEL HON LENNEGEZH O C’HWEZHAÑ (44)

« Prederiañ ’ra gant marzh ar barzh
O kantren diharz ’hed ar c’harzh
Sammet estlammus e spered
Gant an esmae hag an eston
A sko kalet en e galon
Doaniet, moaniet ha gwall boaniet.

War hud burzhudus an Natur
Kudenn vut d’an holl dud asur
E klask meizañ reizh, hep geizoù,
Kloular, hegarat, gant trugar
War an douar, hep ket arvar
Kaner kan ar c’harantezioù. »

Ur barzhoneg berr, *Hiraezh ar Barzh*, da raskrid a-berzh hon Yeun ar Gow, d’ur barzh all, Reunan ar Moun, en 1957. Moarvat unan eus barzhonegoù kaerañ hon Yeun. Priziet e vo an enklottenoù ha pa vefent dizingal. Dediet d’ur mignon tost, unan eus e vro. Bro Jakez Riou.

Hon Reunan avat ne lezo ket un oberenn puilh-puilh war e lerc’h. Ha daoust hag-eñ eo ret pouezañ war ar fed n’eus ket a oberenn vihan. Oberennoù zo, tra ken. Kement pezh lennegel en hon yezh, dre hon yezh hag evit lennerien ha selaouerien hon yezh zo un tamm eus an egor lennegel adpiauuet. Kement pezh zo a ro digarez dimp da gemer perzh en Republik Lennegezh ar Bed, pe en Republik Lennegezh ar Bed, evel a garfet...

Skrivañ zo un ezhom, skrivañ zo ezteuler hon garm, hon drivliadennoù, hon selloù war ar bed omp perzhiek ennañ. Ha skrivañ en brezhoneg zo lakaat ar varrenn uheloc’h c’hoazh. Skrivañ evit piv, eme Pêr-Jakez Helias. Goulenn aner. Ma ne skrivomp ket evidomp-ni, ne savo tamm gweledigezh, tamm sell pe arsell war an dazont. Sede ar Pêr-Jakez e vije bet splotusoc’h dezhañ derc’hel da skrivañ en brezhoneg. Rak skrivañ en brezhoneg zo un akt a stourm. Boulc’hurun ! Ur stourm kalet ? N’onn ket. Ur stourm didruez, se a ouvezan evel kement hini ac’hanomp.

Hon Reunan en devoa savet e varzhoniezh diwar kizidigezh e spered hag e galon, en skrin un Natur a drivliadennoù dindan e zaoulagad. Un Natur test d’e gammedoù a-hed an hoaladoù bugel pe krennard pe gour...

Sede ma roan amañ tammoù eus e varzhoniezh bet embannet gantañ er gelaouenn *Gwalarn*.

Kraksonennoù :

1 - « Mintin gleb

... Â C’hlich !

Ne zalc’hez ket rak gouloù kriz !

Maodez Glanndour.

Er mintin-mañ,
Ur vrumenn dev a skignas war ar wrimenn,
A spegas ouzh ar bleñchoù, ’hed ar skourroù,
Perlezennoù, perlezennoù, perlezennoù !

Ken n’oa heñvel bolz ar bodoù,
Haleg, aozilh, bezv, kelvez,
Kigvez,
Ouzh palezioù kinklet, hudvoredet...

- Piv a zeuio,
Ur briñsezig ’n ur gorolliñ ?

Piv zo pedet,
Ar boudiged gwevn ha lijer ?

Fichet ar palezioù – boull ha goullo ! –

Ur mouch avel
Hag ar mouile'hi, o piklammat,
O deus pilet greun ar glizh.
- Lugern, lugern, lugern !
An heol kriz o parañ,
- Krog'ta ! Krog'ta ! –
En deus silet, 'dreuz ar bodoù,
Skinoù minlemm
E-giz pavioù ur gevnidenn,

En deus sunet
Kement lommig a oa chomet
- Bruzun, bruzun, bruzun !...

Mintin gleb ?
Chapeledoù luc'hus o tishiliañ,
Liorzh-hud trivlius – Kaerat touell ! –
Arouez va yaouankiz aet hebiou. »

2 - « Eñvorennig

Heñvel an diskourrer ouzh an Ankoù...

Nag e vourren, p' oan yaouankik,
Klevout, hanter-vouget er vogidell,
Taolioù stank ar vouc'hal o labourat !

Hag o sklankat penn-da-benn ar stankenn
Krukoc'h-krukañ ! 'trezek menez Kruloù,
- Tra ma strinke tammoù skolpoù
'Vel laboused o tiboufañ –
Ar penngosoù dopes taget en o c'hozhni !

Pegen bourrus e oa gwelout 'dal ar beure,
O c'houlaoiñ, 'tousez ar gwial, o goulloù,
Hag o skediñ – nag un dudi ! –
Delc'h ar girzhier gloazet kig ha gwad,
Kalon guzh ar bodoù, dizoloet !

O tommheoliañ 'tousez ar gwial,
O tisec'hiñ ! – Kriz ar vicher !

Heñvel an diskourrer ouzh an Ankoù... »

Gwall uvel an titl dibabet gant hon Reunan : *Kraksonennoù*. Dilorc'hentez ? Elevez, suroc'h. Ur barzh o leuskel un trivliad bennaket da vont, un trivliad da vezañ lakaet dindan ur gwerzennoù bennak : « Liorzh-hud trivlius – Kaerat touell ! – / Arouez va yaouankiz aet hebiou. ». Hon Reunan, awenet, ha dindan hoal Natur e vro. Magañ e weledigezh.

Ur barzh gant e goustiañs ivez, koustiañs an Natur gloazet. Trouz, gwad ha goulloù. Ul lennegezh a heklevioù eo hon lennegezh. Un heklev o tassoniñ en hon barzhoniezh, evel en barzhoniezh Añjela

Duval. Hon Añjela, hi a ouie sachañ hon evezh war an harlu, war torridigezh chadenn ar yezh, war an arallekadur, war ar bed o cheñch hep na vefe goulennet hon ali. Hon Añjela hag a ouie ivez diskuliañ splann an droug degaset gant an arc'hant bras, an droug deut diwar an Natur foeltret ha dismantret. Gant hon Reunan e weler, e klever ul lod eus an darvoudoù-se. Ha gant mouezh torgos derv divarret hon Añjela eo sklaeroc'h c'hoazh :

« Setu me amañ bremañ,
Hañval ouzh ur peulvan,
Ur peulvan goullet,
Ur peulvan mac'hagnet.
Pebezh dismegañs !
Birviñ 'ra va gwad em gwrizioù
Gant an droukrañs. »

Ha komz ouzh an divarrer, an diskourrer :

« Troc'het ec'h eus din va barroù,
Graet ec'h eus din goulioù,
Va diwisket en noazh !
E noazh er goañv yen !
Rak diframmet ec'h eus din zoken
Va gouhin iliañ glas.
O den hep elevez !
Hep truez ouzh va gloaz.
Ma ne varvan gant ar riv
E riell miz C'hwevrer,
Me 'bako sur mat
Un taol-gwad,
Gant va fenn moal ha diskabell,
E bannoù treitour Heol Meurzh. »

Ne gav ket din eo mont re bell lâret hon eus aze egin un emskiant ekologour. Hon ekologiezh ac'h a eus ar c'hleuzioù hag o annezidi munut, a-dreuz anvioù ar parkoù niverus, an tachennoù kloz ha diskloz, ar pradoù dourek, ar c'hoadeier stank ha distank, betek ar yezh a ra gwad hon identelezh. Ekologiezh, ekosistem hon buhezioù brezhonegerien. Teurel evezh ha prederiañ ouzh hon goulenn sokial. Komz ha skrivañ. Hon akt a stourm pemdeziek.

Herve Bihan

Levrlennadur

Reunan ar Moug, *Kraksonennoù* (1), Gwalarn, Niv. 140-143, Gwengolo-Kerzu 1941, pp. 142-143.
Reunan ar Moug, *Kraksonennoù* (2), Gwalarn, Niv. 146-147, Meurzh-Ebrel 1942, pp. 143-145.
Reunan ar Moug, *Barzhonegoù*, Emgleo-Breiz, [1957].
Añjela Duval, *Kan an Douar*, Al Liamm, 1973, pp. 37-39.